

Gourvil : Montroulez 1889 – Villeneuve Saint-Georges 1984)

Taolenn

Ar boutaouer koad

Ar boutaouer koad

Me am-boa eur vestrez saozez
Hob y deri dando...
Penn melen, teod hir ha luechez,
Yannig a gan atao !
Med pa gomzen a zimezi,
Yannig, Yann,
O ! nann, ne rin ket ar fazi,
Yann gamm, paotr e vamm,
A galsk bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm,
En-dije tapet eur pezh lamm !

Heñvel 'oa he mouez o kana,
Hob y deri dando,
Ouz eur goz vuoh o vleja,
Yannig a gan atao !
Ouz eur hoz ki oh harzal,
Yannig, Yann.
Eet e damm askorn gand eun all ;
Yann gamm, paotr e vamm
A glask bepred ar gwella tamm,
Yann gamm, paotr e vamm
En-dije tapet eur pezh lamm !

Dreist ar mor e nij va halon,
Hob y deri dando,
'Trezeg va mestrez ken mignon,
Yannig a gan atao !
'Trezeg an êl a garante'
Yannig, Yann,
A zo 'barz va zoñjou noz-de',
Yann gamm, paotr e vamm
A glask bepred ar gwella tamm.
Yann gamm, paotr e vamm
En-dije tapet eur pezh lamm !

(Troet diwar ar hembraeg).